

Depeign an Assamble national

(Var tòn : *Ar gananeen*)⁽¹⁾

1

Cals a dut fur a gavan nec'het — Casi partout dre ar broiou
 — Emaint o tourmant o speret — O clasq compren an de-
 crejou — Mes biquen ne vezint ententet — Nac er vroma, nae
 e leach all — A nez gout penaos e composet — An assamble
 national.

2

Nor boa ni quet choaset da quenta — A oll dut ar rouan-
 teles — Ar re a gaffemp effrounteta — Eus a guear ac divar
 ar mes — Hep lesen, hep resoun, hep studi — Nemet et
 chozchent causeal — Oll e soant mad da rebresanti — An
 assamble national.

3

Clevet oc'heus coums a arch Noë — Da bini e oue digasset
 — An anevalet dre urs doue — A guement corn a ioa er bed:
 — Nemet eis den ne oue destumet — E toues al loanet brutal
 — Pet a soung deoc'h ave cavet — En assamble national.

4

Tud a ilis, ac avocadet — Tut gentil, a labourerien —
 Heretiquet a catholiquet, — Philosophet a christenien —
 Ne alle an eil entent eguile — Pa errujont ebars er sal —
 Penaos ober gant ar seurt-se — En assamble national.

(1) Cette chanson, moins longue que la précédente, s'y rattache par plusieurs traits. Elle en est pourtant assez indépendante pour que nous la reproduisions intégralement à part. Le texte est celui du manuscrit Cœff. Le titre est supplié d'après le manuscrit de Plouescat. — Pour Durand (*op. cit.*).

5

Da goumanç o deeus essee — Tremen evit tud a feçoun —
 Tri mis antier o deus disputed — Hep gallout entent nep
 resoun : — Mes evit laerel an nifion — Int nem ententelet
 ractal — A chetu eno intention — An assamble national.

6

An ourgouil ac avarisdet — Al lubricite, an avi — An dibri
 pe efa direglet — Ar goler ac an diegui — A ioa reprovet
 er gristenes — Evel sez pec'het capital. — Emaint brema
 o seis assambles — En assamble national.

7

Dre ourgouil o deeus digasset — Eur paper da rei da
 entent — E ranco ar bed oll estonet — Ener gontempli o
 squient — Ansao ne deus den fur nemete — En amser ma,
 na bet gueach all — Chetu sougue a superbite — An assamble
 national.

8

O bouclou archant o deus roet — Evit sicour paea o dle, —
 Mes o fansion o deus miret — A taxet da nao scouet bemde, —
 Quemerent eta patientet — Nao scouet bemdes ne dequet fall,
 — Profit so en avarisdet — En assamble national.

9

Henoret o deus evel daou sant — A lequeat ober imachou —
 Da zaou scrifannier impertinant — Gueachal chasseet eus
 o broiou, — Abalamour do lubricite — A cals a insolânçou
 all, — It goude da glasq ar burete — Dan assamble national.

10

Evel coums en den aenor — En den onest ac en den fur —
 Evez chasseet eves ar gador — Gret desan mil displijadur --
 Biscoas ne deo manquet an avi — Etoues an artisanet fall --
 Ema nos deis och o devori — En assamble national.

11

Clevet emeus o doa leinet — Pe zijuinet a gonsequans —
 An deis ma oue douguet an decrejou — Var galiteou an noblans ; — Man o barner dioch o decrejou — A dioch o resounou brutal — E rear alies re gorfajou — En assamble national.

12

Nemet dre goler a dre valiç — Ne glever parlant er plac-se —
 Ne oufet quet counta pet solis — A rebeich an eil deguile —
 Ar blasphemou ac an injuriou — An insultou ac ar scandal — Ne glever quen seurt litaniou — En assamble national.

13

Quent eguet lacat var ar paper — O lesen ac o decrejou —
 E tligent impligea o amser — Da ober reflexionou — Guel eo ganto mont da chalvantet — Da luxambour a da Vox-hall.⁽²⁾
 — Eguet na de chom da labourat — En assamble national.

14

Rac-ze var lesen ar seis pechet — E ranquet chench ar catechis — An oll esqueb a so chasseet — Ar pap ne mui pen an ilis — Gouvernet vesu mer gout⁽³⁾ piou ! — It da len an original — Scrifet e paris var gayerou — An assamble national.

⁽²⁾ Lire *Vox-hall* au lieu de *chroval* que porte le texte.

⁽³⁾ Lire *gant*.

45

Mar bes biquen anvet anavez — E plaç ar re a so eno —
Me meus er c'hi a ielo iveau — Excellant eo en e hino — Ne
anavez prinç na digentil — Pap, nac escop na cardinal —
Ennes a vesò eur pez util — En assamble national.